

YF_0072_Merc'hed Kermarc'h

Chanson composée par Yves Le Fur de Mael-Carhaix (surnommé "Ar Waon" comme le bruit de sa moto qu'il ne quittait pas). Il a composé également Ar Mevel, chanté sur le ton hir et Merc'hed An Amann, chanson racontant le marché noir durant l'occupation allemande et publiée deux fois: cassette KAN (A. Le Clere - Denez Prigent) Kan Ar Bobl Duault 1987, RKB. Disque 33 T AR SKRILHED (P. Huellou) Velia. Appris par Alain en 1976, chanté par Christine An Du (Mael-Carhaix) - air chanté par Maria Hoat et Celina Melou (Mael-Carhaix).

Chanson teintée d'anticlérisme à propos de la propension des femmes de Mael-Carhaix à être trop généreuses vis-à-vis du denier du culte, et à trop écouter les "recommandations" des prêtres de la paroisse.

Ni 'neus kanet ha danset ha 'nem zibatin hon daou
Evel ur volenn rousin o vervin war ar glaou

Evel ur volenn rousin war ar glaou o vervin
Dre forzh kan 'ta kamarad dont a ramp da skuizhin

Ur ger bordig an hent bras 'vit reiet deoc'h da gompren
Zo graet da merc'hed Kermarc'h pa weleint beleien

In Kermarc'h pa vez klevet ur beleg zo antreiet
Raktal un asamble vras zo graet gant ar merc'hed

Ar c'hentan rnad a vez graet e vez chanchet ar c'hoefou
Hag e touchont ar vatezh da furchal el liorzhou

Hag e touchont ar vatezh da furchal el liorzhou
Evit gout pegement 'o a ya ba o neizhiou

Ha ma peus bet gwelet ar chas na war-lerc'h ar geden
Weliet merc'hed Kermarc'h, pa welaint beleien

Ar gafetierenn ba kost an tan, ha gwin divouchonet
Ar c'hognag hag ar mader, tout 'c'h aint gant beleien

Pa vez evet ar mader, ha deb't ar viou fritet
Me zo or un tammig kest 'vez laret d'ar merhed

Ya dimeus hoc'h aezamant hag ho polontez vat
Nebeutoc'h 'vit ugent real, se n'eo ket resevabl

Ha ma 'vez ket reiet de dimeus o goulennou
Distaget deus an iliz ha deus ar pedennou

Distaget e ve' int ivez dimeus ar sakramanchou
Trelatet eo ar merc'hed gant un nebeud komzou

Div pe deir, a glevan laret n'int ket stert da voemo
'Vit rein arc'hant d'ar c'hure e werzhaint o brozhiou

Brozhierou tavanjerou, klevet meus laret alies
Evit rein arc'hant d'ar c'hure c'h aint e lostennou ivez

Ha ma vezint ket e-barzh an ti, siwazh daouzek gwennege
Bec'h da glask kaout da zebrin dek 'o reiet d'ar beleg

Gwelet meus bet e-barzh in Kermarc'h pa 'vez ket a voneiz
'Re-se 'c'h ae raktal d'ar vourc'h 'werzhaint o-zamm gle

Rejouiset o c'halon 'lar keno d'ar merc'hed
Un tamm arc'hant ba o godell o revr de bout karget

Neuzen 'vez gwelet ar merc'hed o ya barzh in Kermarc'h
'Vlejal war-lac'h ar c'hure goude ve'int divoem't mat

Na me ho ped 'ta merc'hed leskit ho viou 'n o neizhiou
Hag a leskit ho mader ba korn ho pufedou

Hag a leskit ho mader ba korn ho pufedou
Ha 'benn 'welit beleien 'werzh ket ho prozhiou

Kar betizo bras-meurbet zo graet gant beleien
C'hoant am-eus da jujo ne gwazh 'vit pilhaouerien

Ma faota deoc'h gout ha klevet piv 'neus graet ar chanson
Ar champion deus parrez Vel da ev' pernoio

Ar champion deus parrez Vel da ev' pernoio
Ganet eo barzh in Kermarc'h, jandarm 'barzh ar Marok